



TALABAO 11

ar gazetenn a ra trouz!



TALABAO, KAZETENN AR VREZHONEGERIEN YAOUANK
ISSN 0982-8311 - CPPAP 69032




24,00 L

Azeuldi an Daouelezh

Setu kartenn Azeuldi an Daouelezh. Evel-just ez eo ret bezañ daou evit mont e-barzh ha dre zaou hent disheñvel: dre an norioù A ha B. Evit mont a sal da sal e rankot tremen dre un nor ha na zigoro nemet pa vo ho mignon dirak un nor all an hevelep niverenn warni. Goude ho tremen e serro an nor, hogen digeriñ a raio en-dro, evel-just, er memes doare...

Daoust ha fin a-walc'h e viot evit kavout an daou hent a gas d'an Azeuldi e-unan?



TALABAO, embannet gant AN HERE
Kazetenn ar vrezhonegerien ysoank
ISSN 0982-8311 - CPPAP 69032



Renner ar gazetenn: Alan DIPODE
© Copyright evit an holl bennadoù
ha tresadennoù gant AN HERE, 1988.

Niverenn 11
Gwengolo/Here 1988

TAOLENN

Azeuldi an Daouelezh	2	Alan Dipode
Troioù-koer Fañch ar C'hulk	4	Paskal ar Marc'heg
C'hoariomp...	11	Marivon Berr/Alan Dipode
Labour-dorn	12	Natacha Nabisa/Alan Dipode
Gerioù	16	Martial Menard
An dootrou Broc'h	17	Martial Menard/Alan Dipode
Marsel-Tapiv, igounier	25	Tudual Huon
Pluennig ar wendolig	28	Youenn Kervalan
Dionisos	30	Alan Botrel/Alan Dipode
An torr-penn	33	Alan Dipode
Ur sell war hon Istor	34	Alan Dipode
Eurêka!	38	Tarzhig

Maketenniñ ha pajennadiñ gant Alan Dipode



Arabat didroc'hañ TALABAO! Gwelloc'h eo adskrivañ ar baperenn a gavot amañ dindan!

Ma c'houmanantit da dTALABAO, pa c'hourc'hemennan! Ra bado ar c'houmanant:

1 bloavezh (120 L) 1 bloavezh, komanant skoazell (adalek 150 L)

ANV _____ Anv bihan _____


Chomlec'h _____ Kêr _____

(Kargit ho chekenn en anv AN HERE, hag he c'hasit da: TALABAO, Hent-dall Kergalenn, 29112 LANDUDAL)


FAÑCH AR C'HUIK

Fañch ar C'hulik





NE SELAOJAS KET IWAN HA FAÑCH AR CHININADOU. ARABAT EO SELAOJ AN DUD GwirKET FALL, BUGALE. AR RE-SE N'INT KET FUR HA VEFENT FUR E VEFENT GwirKET NAËT HA KEMPENN, EVELDOCH HAG EVELDON. FAÑCH HA YANN A GAVAS FRED BUAN HA RAKTAL E KROGAS AN PAOU BAOTR YAOUANK HA KALONEK GANT O MIL MICHER.






EVEL-JUST, NE VEZE KET UHEL-SPONTUS AR GOPROÛ.



HARZ AL LAER!!



SINAZH, VA BOGNE
BAOUR, N'G DOA
KET FAÑCH HAG
IWAN LABOURET
KALZ EN O
BUHEZ EN
A-RAOK.
NE QUIENT KET
E OA
SKUİZHUS AL
LABOUR.
AN TRAOÙ
A DROAS
TAMM BA TAMM
DA FALL.



Oberiadurioù Marivon


KADOR mui TAOL a zo par da ARVAL! Setu kavadeni diwezhañ Marivon. Aes eo da gompren: pep lizherenn a zo bet lakaet evit ur sifr, atav ar memes hini. Daoust hag-eñ e viot gouest da adkavout ar sifrou all, ma lavaran deoc'h ez eo bet lakaet V evit ??

$$\begin{array}{r} \text{KADOR} \\ + \text{TAOL} \\ = \text{ARVAL} \end{array}$$



Ar gael-Ifern

Marivon BERR



A-LED

1. Drezi e vez komzet gant Tazhig. - 2. Kennebeut! Stumm ar verb bezañ. - 3. Pelec'h? Stumm Italia. - 4. Sac'h-grouan al laboused. Rannig. - 5. Pleg-mor bihan. Trepell treuzvisket. - 6. Pa (grog) an tan ennañ ne vez ket galvet ar bomperien. - 7. Aoze. Ger-mell. - 8. Divaskell ar pesked.

A-SERZH

1. A-liv gant ar brulu. - 2. Hent ar sarpantou-nij. Danvez dañvad. - 3. Penn-leuc. - 4. Raganv-gour. Liv eilpennet. - 5. Ger-mell. - 6. Ar plac'h all. Disheñvel. - 7. Nedeleg! - 8. N'o deus na melen na gwenn. Bez' o deus ur melen hag ur gwenn.

LABOUR-DORN



Demat deoc'h, tudoù!
Mat an traoù ganeoc'h?
Ar wech-mañ n'ho po ket ezhomm
a galz a dra evit fardañ

Abuzeteziou orjal

Grit gant orjal tev ha diblegus a-walc'h, diaes da zistummañ gant ho taouarn: orjal 2 mm treuz a vo mat. Stummet e vo an orjal gant piñsedoù ront ha piñsedoù hollek. Lous e vo ho taouarn hep dale! Lakennit pe gwer-nisit hoc'h abuzeteziou ur wech echu o fardañ; ret e vo e ober alies a-walc'h dre ma vint gweet ha rimiet meur a wech...




Graet gant tammoù gwisket an eil war egile eo an abuzeteziou-mañ, a ginnigan deoc'h fardañ ha diskoulmañ.

Evit gwir e vez meneg bewech eus distagañ un tamm diouzh ar re all. Evit dont a-benn d'e ober, prederiit mat war an doare da lakaat tammoù 'zo da dremen pe an eil re e-barzh ar re all, pe an eil re dindan ar re all... Taolit evezh ivez ez eus tammoù na servijont da vann ebet: lakaet int bet evit ho tiheñchañ!

Pemp pimpatrom disheñvel an eil re diouzh ar re all a vo studiet:

- A. Gant ur sifellenn o kemer un hent a-ratozh.
- B. Gant un tamm o tremen e-barzh un tamm hir e stumm.
- K. Gant tammoù pleget an eil re war ar re all.
- D. Gant tammoù emprent an eil re e-barzh ar re all.
- E. Gant ur walenna a zo ret pouezañ warni evit he dieubiñ.



Al lunedoù-fri

(Pimpatrom A)

Ret eo distagañ al lunedoù en ur lezel ar sifellenn en-dro d'ho kouzoug.

Doare kinnig


Staget eo ar sifellenn evel diskouezet eil lun 1, da lavaret eo e rank al lagadenn a bezañ war-c'horre. Ret eo ivez e tremenfe ar sifellenn dres evel diskouezet amañ.



Lun 1


Diskoulm

Kaset 'vo al lagadenn a d'an tu kleiz en ur heuliañ hent ar sifellenn (Lun 2).




Lun 2

Bremañ e vo kaset al lagadenn d'an tu dehoù en ur dremen dreist al lunedoù (Lun 3).



Lun 3


Kaset e vo d'an tu kleiz en-dro, en ur dremen dindan al lunedoù (Lun 4): n'eus ken nemet sachañ war ar sifellenn evit he distagañ.



Lun 4



Fulupig Fri-furch
(Pimpatrom B)



Lun 1

Aet eo Fulupig Fri-Furch da lakaat e fri e-lec'h ma ne oa ket ret ober, ha setu-eñ tapet vil! Penaos ober evit e zieubiñ diouzh an housarnaj fardellek-se?


Ar fardañ

Ret eo d'al lagadenn a bezañ bras a-walc'h evit ma c'hallfe en em silañ en-dro d'ar fri ha d'ar genoù.


Pa vezont kelc'hiet gant al lagadenn a e rank ar fri hag ar genoù bezañ bras a-walc'h evit lezel al lagadenn b da dremen (Lun 1).



Hervez Desha Douzet



Lun 2



Lun 3

An diskoulm

- Lakait al lagadenn a war ar genoù a' (pe war ar fri a').
- Lakait al lagadenn b da dremen e-barzh ar genoù, ha lakait anezhi da wintañ war an tu all (Lunioù 2 & 3). Tu 'zo bremañ da zieubiñ Fulupig Fri-furch...

Genou



Ar prizoniad hualet
(Pimpatrom B)

...Dishualit anezhañ!

Ar fardañ

Tric'horn a an hual a rank bezañ bras a-walc'h evit en em silañ war gaol ar prizoniad.

An divrec'h distabil hag ar chadennig ne dalvezont nemet da zihfechañ ar c'hasker ha da lakaat an embregañ da vezañ diaes...

Tu 'zo evel-just da lakaat ur sifellenn e-lec'h ober gant ur chadennig!

Diskoulm

Lakait tric'horn an hual da dremen war gaol ar prizoniad, ha sachit diouzh an traoñ (Lun 1).



Lakait ar walenn hirgelc'hiek da dremen etre an div c'har ha kasit anezhi d'an diadre (Lun 2).

Sachit war an hual, diouzh an nec'h: gounezet!!


*Spi an eus e plij deoc'h an abusetioù-mañ!
Un tamm skiant-prenet ho peus bremañ evit o fardañ: en niverenn a seu e vo gwelet re all,
ar pimpatromoù K, D hag E.*

Ken ar c'hentañ,


NATACHA



Lun 1



Lun 2



Lun 3

Gerioù

Evel petra?

Eus un den hag a vez laouen-kenañ e lavarer e vez laouen evel an heol. Hogen, penaos e lavarer: evel?... Deoc'h da glask en dizurzh a zo amañ dindan!

1. Teñval evel...
2. Sklaer evel...
3. Laer evel...
4. Kreñv evel...
5. Pinvidik evel...
6. Paour evel...

E. An dour	B. Ar mor
C. Ur sac'h	D. Lagad an naer
F. Ur marc'h	A. Ur razh iliz



Ar veskellgarrezenn

Gant pemp lizherenn hepken ez eus tu da leuniañ ar veskellgarrezenn-mañ en ur skrivañ ar gerioù a glot gant an displegadennoù.

Chañs vat deoc'h!

- 1 .
- 2 . . .
- 3
- 4
- 5
- 6
- 7 .

- 1 - Merk an andremened.
- 2 - Labous.
- 3 - Reiñ un anv.
- 4 - Anv-bihan laouen.
- 5 - Flamm a-wechoù.
- 6 - Bag maen hor sent kozh.
- 7 - Rannig-verb.

Al lizherenn a vank

... n vezout 'rit r c'ho ri-m â!

1. _ ENN : loen bihan
2. _ ENN : lodenn eus ar c'horf
3. _ ENN : evit faoutañ ar c'hoad
4. _ ENN : diaes
5. _ ENN : ledennad dour
6. _ ENN : musul kozh

DIELL

Ma ne vefe ket bet dilennet ar gaerell-wenn da loen ardamez evit Breizh, hor befe gallet dilenn

an Aotrou BROC'H



... rak gant e benn gwenn ha du, n'eo ket mezh gantañ diskouez livioù hor bro, re-bar d'ur banniel dispak en avel!

Ur c'haer a loen a zo eus ar broc'h evit gwir.

Anvioù all a vez roet dezhañ e Breizh: ar griz pe al louz. Diaes eo kompren perak ez eo bet badezet en un doare ken divalav gant ar Vretoned, rak ned eo tamm lous ebet, en enep d'al louarn hag a zo ul loen flaezius, mard eus...





Dre-benn d'e neuz dopes ha d'e gerzhed pounner ez eus bet kredet hir amzer e oa ar broc'h un ezel eus kerentiad an ourzeged. Ha gwir a-walc'h eo ivez en deus tres ha gobari un arz bihan.

Hogen ur fazi e oa. E zentadur hag e wragennoù fraez o deus lakaet ar skiantourien d'e rummata diarvar e kerentiad ar c'haereged, evel ar braz eus ar bronneged kigezat gouez a vev en hor bro.

An hini brasañ anezho holl eo zoken, pa c'hall tizhout 1 m hed, lost hag all, ha pouezañ etre 10 hag 20 kg peurvuiañ. N'eo ket ken flour e feur hag hini e gerent avat. Reut ha hir eo e vlev, liv louet dezho. Gwenn eo e benn gant div rizenn zu o vont eus an divskouarn d'an daoulagad.



**KARTENN-ANV
VROADEL**



Nnn 316196/29-K

ANV BROC'H

Anvioù bihan Griz, Lous

Kevrennad bronneged

Urzhiad kigezaded

Kerentiad kaereged

Genad Meles


Spesad Meles meles

Sinadur an titlad,



Annezañ a ra ar broc'h er c'hoadoù hag er brouscoadoù, tost d'an douaroù labourer, lec'hioù aes da bourchas boued. Ned eo ket laouen ar gouerien outañ, rak re vat holl e kav ar maiz ha tammoù distrujoù a ra dre ar parkadoù.

Un touller daonet ez eus anezhañ, ha stummet eo diouzh se gant ar skilfoù gal-loudus a zo ouzh e bivier a-raok ha gant e voj hirvoan.



(treset diwar K. BRANDT)

PAV DEHOU A-RAOK
UR BROC'H,
eus tu e balv
(en e vir vent)



E lojeiz, un douarenn, a zo ur gwir grañvlec'h. Ouzh he ober ez eus meur a gambr naet ha kempenn, pallennet klet gant foenn, man ha delioù sec'h. Meur a wech e vez freskaet e c'houzer bep bloaz gant ar broc'h. Da vont eus ur gambr d'eben ez eus ur rouedad ribouloù kemplezh, ur gwir vilendall. Diboukañ a reont en aer fresk hag ouzh genoù pep hini anezho e weler e-leizh a atredoù, mein ha douar, hag a vez berniet eno dre ma vez toullet e zouarenn gant ar broc'h. Dre forzh tremen hag adtremen 'vez stummet ur meni hent en atredoù-se. Ar c'han a vez graet anezhañ.


Da doullañ e zouarenn e vez loc'het get ar broc'h kementadoù bras-spontus a zouar, betek 30 pe 40 m³ a-wezhioù... ma c'hell an ardremez cheñch doare zoken!

An douarennoù bihan ha krenn ne roont bod nemet d'un nebeud broc'hed. An douarennoù bras, i, 50 genoù dezho pe ouzhpenn, a vez meur a goublad o kenvevañ enno. Moarvat n'eus ket un amezeg tagous eus ar broc'h, rak gwelet e vez loened all o tont da annezañ an douarennoù bras, evel al lapined, ar pudiski



hag ar c'hizhier gouez. Don en douar e vez kleuziet ar c'hambreier, betek 3 pe 4 m. Eus ur bloavezh d'egile e vez brasaet hag adstummet o lojeiz gant ar broc'hed, labourerien difaezhus anezho.

Ouzhpenn an douarenn bennañ e vez toullet ivez un addouarenn, ur c'hant metrad bennak pelloc'h. Enni e vez kavet diouzh ar goañv ur par chomer bennak, kaset kuit eus an douarenn bennañ gant ur barez o tougen. Douarennoù all a vez toullet c'hoazh pell diwar-dro. Implijet e vezont da vareoù 'zo eus ar bloaz, pa vez boued fonnus el lec'hioù-se.





Broc'h ha louarn

Er mareoù-mañ ma vez renet ur brezel ken diot ha m'emañ didruez ouzh al lern, en abeg da gleñved ar gounnar, ned eo ket brav bezañ broc'h.

Ne daoler ket nemeur a evezh da c'houzout hag-eñ emeur dirak douarenn ur broc'h pe hini ul louarn. Lakaet e vez aezhennoù pistrus da vont dre ar riboulioù ha lazhet e vez evel-se annezidi an douarenoù...

Disheñvel-bras eo koulskoude douarenoù ar broc'hed diouzh re al lern.

Ur bern atredoù a vez bepred dirak douarenn ar broc'h. Hini ebet dirak hini al louarn.

EVEL-JUST! EN DOUAR BLOT E VEZ KLEUZIET GANT AR SKRIBITON - SÉ! HA CHOAZH! PA NE YA KET DA ALOUBIN DOUARENN UNAN BENNAK ALL!



E-leizh a hentouigoù bihan, ar roudennoù, a ya kuit diouzh douarenn ar broc'h. Darempredet e vezont ingal gantañ. Se ne vez ket graet gant al louarn.

'M EUS KET EZHOMM! GWEVN ON, ME!



Tro-dro da zouarenn ar broc'h e kaver pakadouigoù foenn. Ar re-se eo e c'houzer hag a vez cheñchet meur a wech gantañ e-pad ar bloaz.



N'EO KET ME A YELO DA LEZEL LASTEZ DIRAK DOR MA ZI! NANN 'VAT!

Ouzh genoù douarenn al louarn e kaver kac'hadennoù. Ar broc'h, eñ, a ya da gac'hat en e bodoù.



EVEL-JUST! PENAOS 'VEZ GRAET GANEOCH -C'HWI?

Gwezh ebet ne vez gwelet diler-c'hioù boued e-kichen douarenn ar broc'h. Alies e vez e-kichen hini al louarn.



PETRA 'REOT? BEZ' EMAN AN DUD SEVENAET HA BEZ' EMAN AR RE ALL!

C'hwezh ar foeltr a vez en-dro da zouarenn al louarn, ken ma'z eo diaes padout!



MA NE BLIJ KET DEOCH AR C'HWEZ-VAT A IMPLIJAN, N'HO FEUS KEN NEMET PAEÑ UR VUREDAD ALL DIN!



Evel ma weler ne blij ket al loustoni d'ar broc'h. Setu perak ne vez ket gwelet kac'hadennoù amañ-hag-ahont tost d'un douarenn broc'hed.

Evit mont diwar e gorf e vez graet get ar broc'h toulloù bihan, don un 10 pe 15 cm bennak, hag a vez graet podoù anezho. Enno ez a da gac'hat. Ar meni pri-veziou-se a zo unan eus ar merkoù anatañ a zizoloer pa vezer o klask broc'hed.

N'eus ket keit-se c'hoazh ne anavezet nemet nemeur a draoù diwar-benn buhez kevredigezhel ar broc'hed.

Bevañ a reont en ur gumuniezh, bras pe vrasoc'h, pared ha pazed o kengor-voñ un damani-bevañ boutin dezho-holl. Evit ar pezh a anavezet e Breizh e kaver etre 7 ha 74 douarenn dre 100 km². En damani-se emañ tiriegezhioù ar pared. Evel an holl loened e vez merket o zachenn gant ar broc'hed. Ar podoù-kac'hat eo a dalvez da se dreist-holl.

Penaos? Petra emañ oc'h ober?
O ironellañ c'hwez ma c'heneiled war kef ar wezenn-mañ, evel-just!
Penaos? Da betra e talvez ar c'hwez-mañ?
Da verkañ damani-bevañ hor c'humuniezh, anat deoc'h! Penaos e c'hallfe hor re yaouank anavezout hon damani, mod all?



Bruce Colman Ltd/E. Breese-Jones



Ar vroc'hez a zoug un torad re vihan bep bloaz, etre 2 ha 5 anezho hag a vez ganet e miz C'hwevrer. War a seblant ned eo ket gwall chalet ar vroc'hez da c'houzout piv a vo tad d'he re vihan rak mont a ra d'en em barañ gant meur a vroc'h, pe e vefent chomerien pe gantreerien...
Ar broc'hedigoù a vez tri miz-pad o tenañ o mamm. Goude e vezont maget gant boued dislonket. Da neuze e vezont gwel-let o tont er-maez eus an douarenn da ebatñ etre kamaladed. Hag a-benn 6 miz e klaskont o boued o-unan.



Ernest Meul

Broc'h yaouank, 9 sizhunvezh dezhañ



Broc'h yaouank, 7 miz dezhañ



L. Lafontaine

... Hag an aotrou Broc'h, graet e lamm-gresk gantañ.



J.P. Varin/Jacana



Pebezh loufrez!

A bep seurt a ya d'ober boued ar broc'h. Met un debrer buzhug daonet eo, etre 100 ha 200 buzhugenn bep noz! Ruz eo war an amprevaned ivez, ar c'hwiled-kaoc'h dreist-holl; hogen ar gwesped, ar sardon, ar biskoul, a vez debret gantañ kenkoulz all. Ha n'eo ket echu: raned, glazarded, logod-mors, minoc'hed, avalaouered, lapined, razhed, naeron, melc'hwed, maligorned... ha frouezh ha louzoù: kraoñ-kelvez, finij, avaloù, mez, got, prun, gwrizioù, boued-touseg...



Hogen, mat e kav ivez ar maiz, re vat zoken war meno ar gouerien! Ha setu perak e vez chaset. Met evit chasañ broc'hed ez eo ret kaout un aotre a-ratozh ha tud a vicher eo a ra. Dizouarañ a reont ar broc'h gant chas hag ur wezh ma vez bet dizoloet e vez tennet er-maez gant pikoloù gevelioù.




E. Duescher (RFB...)



Ar broc'h hag ar yezh

Gwechall, pa veze gounezet ed-du e Breizh, e oa sot ar broc'hed ganto. Kement a drouz a raent, hervez, o kas an ed-du-se d'o douarenn, ma veze anvet an trouz-se charre broc'hed gant an dud!

Ret eo krediñ e roc'h an aotrou Broc'h e-pad e gousk rak lavaret a reer diwar-benn unan bennak hag a gas re a drouz gant e fri: roc'hal a ra evel ur broc'h!



FOEL!
DISORJAL A RIT
LAVARET E VEZ GRAET
KOUSKET EVEL UR BROC'H
EVIT LAVARET RE EO
DON HA C'HWEK
AR C'HOUSKED
!!!

BROC'H pe LOUZ?

Penaos 'ta ez eo deuet ar ger louz a-benn da grignat tachenn ar ger broc'h evit envel ul loen ken hegarat? Hervez an aotrou Lepelletier, en e c'hGeriadur ar Brezhoneg (1752):

Graet e vez louz diouzh ar broc'h evit miret a zistagañ e anv gwir, rak aon na deufe o klevet e anv.

Souezhus, neketa? N'on ket sur-sur e kejet gant ur broc'h pa'z it d'ar c'hoad d'e c'hervel! Re aezet e vefe c'hoari ar re a glask e lazhañ! Ne vez ket lavaret "sot evel ur broc'h"!



RE VADELEZHUS OC'H, AOTROU TARZHIG!
BIKEN NE VIN DIRENKET GET LENNEREN
TALABAD! DIGOR EO MA DOUARENN D'AN
HOLL, C'HWI 'OAR MAT!

UN DRAIG A-RAOK
TRUGAREKAAT AN
AOTROU BROC'H:
NED A ER-MAEZ
EUS E ZOUARENN
NENET PA VEZ.
NOZI ARABAT E
ZIRENKAR E-KERZ
AN DEVEZH-ENTA!



Marsel TAPIV, igounier

OUARFI OUARFI!!
BOURD HA FARS!!...
LAERET EZ EUS BET
UR VARVODSKENN (4)
DIGANT JULIO
LOUZ EFAS! MOAL EO
AR PAOTR! PETRA SONTO
LA SENORA JENOVEFA
FLACHOTA!!

SELAOÛT, ANTON
BE' C'HELLFECH LENN
TRAOÙ ALL, UN
TAMMIG SPEREDEKOCH.
... OUEZAN KET...
... CHOLORI, DA GKOUER
SE 'ZO A LIVE
GANEOC'H!

**DINGELING!
DINGELING!!**

KI-POLIS
SREKLE A PAE
SREKLEH
DAK TH
E WIRA

(1) PERLINGHIN

ALOUS!!! MARSEL TAPIV D'HO
SERVIJAN... PENAOG?... HAG EM
SAL-GIBELLAN EMAON?... TAMM
EBET... EN DOUR, YA... MA!
PETRA 'ZO O C'HOARI GANEOC'H?
LAERET DIGANEOC'H HO
PARVODSKENN? N'OCH KET
EVIT MONT WAR AL LEURENN
HEPTI!!!? EMAOMP O
TONT A-DIZH!!

CHOS!

PLAUM!


**DINGELING!!!
DINGELING!**

N'OUZON KET
FERAK, MET SOTOCH-
SOTAN E KAVAN AN
ENKLASKOU A REOMP!
AR WECH A ZEU E
VO DAV KAVOUT UR
C'HAZH DIANKET!

**HOPHOP
HOPHOP!!**

**FOR FAVOR SENOR
MARCELLO TAPIVOTELLI!**
N'ON NETRA KEN... UR SPES!
A' BED GARV! PLANEDENN RUST
HA KALET... PA DAN EM
BUGALBAJ, MA MAMM BAOUR,
ALIES, A LAVARE DIN MA MAB
JULIO, ...

KAR HA
PED AR
WERC'HEZ



PENAOZ KAVOUT AR VARVOUSKENN-SE? ABSOCH 'VEFE KLASK BLEV WAR AR VIOU!!??

BEZ' EMAN AR SKEUDENN ANEZHI GANIT, 'MAN KET?

SELLIT, BOSS BLEV FAOS A ZO GANT AR GOANTENN-MAN?... .. DIBAREZIT, DIMEZELL! SACHAN A RANKAN OBER!

OK, BOSS! BEZ' E OA UR VARVOUSKENN GANTI!! MET NE OA KET AN HINI VAT!...

SIKOUR DINI!! UR GWALLER!! "MAMM!!!"

LOUSTONI! GAGN VIL!! LORNEZ!!

DIBABIT AN HINI A BUI DEOCH! KAVET HON EUS MIL ANEZH, HENVEL-BLEV!

NANN!! SIWAZH DIN, HINI EBET EUS AR CHREOUICHENNOU 'MAN N'HE DEUS MA C'HWEZ DIN-ME! C'HWEK, GOUREL!!

MA QUE! YO SOY PERDIDO HOMBRE!
¿DONDE ESTA LA GUARDIA CIVIL?
NO SOY MARINERO SOY CAPITAN

PESEURT RANNYEZH A ZO GANTAN? HINI ST IOD? LANDEEN? ...

KASTIHNAG-EO, ANTON!

PARA BAILAR LA BAMBA

SÍOUL, MABÍG, SÍOUL! TONTON MARSEL AMAN A ZO 'VONT DA RENKAN PEP TRAI HA GALLOUT AR C'HOARI DA BAOTR FARV E-PAD PELL C'HOAZH!

SEL' TA!! ISKÍ'S EO?? PETRA EO AN AFER-SE?

MA N'OC'H KET BOAS DA WELET UR STROBINELLER O C'HOARI, SELLIT PIZH, ANTON!

SEYU! ADKAVET HOCH EUS VA BARVOUSKENN!!!... IQUE MARAVILLOSA! ... BURZHUDUS!... MARSEL TAPUS!!

DONT A RA DA SONJ DIN, BREMAN!! DECH DAN NOZ EM BOA GWISKET AR VARVOUSKENN VOAL-SE EVIT SPONTAN MARÍA ... AR VATEZH DU-MAN!!... HA DIBONJET-KRENN DIWISKAÑ ANEZHI! PEBEZH PENN BRELL ACH'ANON!

BOSSI BOSS!
KROGET EO AN ABADENN, HA N'EUS KET AN DISTERAN TRA O TONT 'MAEZ E GORZAILHENN!! LAERET EO BET E VOUEZH DIGANTAN, END-EGUNI!



Pluennig ar wendolig



Dindan koumoul miz Gwengolo
Pa lâre da Vreizh kenavo
E tarzhas kurun ur fuzuilh
Ha Celo a leñvas puilh

Pluennig, Pluennig
Pluennig ar wendolig

E-giz ur maen e oa kouzhet
E-kreiz porzh "Poullig ar Stered"
Ead Celo a selle gant strafuilh
Ouzh frouezhenn gris tonn e fuzuilh

Labousig an Novez-Amzer
O pipial gant poan, en aner
Ne c'halle mui e askell
E'hoari skañv gant an avel

Celo tizhet gant ar from
A oa frailhet e galon
Uor sell a daolas ouz tu e dad
Daeroù gantañ en e zpaoulagad




Hemer a reas ar paotrig
Gant ar brasañ aked, al labousig
E lakaat a reas en ur gaoued
D'e louzaouiñ ha da gousket

Goude peder sizhunvezh
Pareet 'oa ar brizoniader
Hem e c'houlenne-hi digor
Ha vo disparlet dezhi an nor.

Peuze mestr "Poullig ar Stered"
A ginnigas d'e baotrig, nec'het,
Roeñ da Pluennig he frankiz
Goude he magañ e-pad ur miz

Ha Celo "Poullig ar Stered"
E vignonezig en deus diubet
En ur richanañ 'lâras-hi kenavo
Trugarez vras ha d'an distro

Youenn gK yalan



ΔΙΟΝΙΣΟΣ

Troet diwar ar gresianeg
gant Alan BOTREL

EDO DIONISOS o vale bro, hag eñ bihan c'hoazh,
da vont da Naksos. Hir e oa an hent ken ma'z
eas skuizh ha ma azezas war ur maen da ziskuizhañ.
Evel m'edo o sellet tro-war-dro e weias dirak
e dreid ur blantenn o sevel hag a hañvale
dezhañ bezañ kaer-meurbet, ma reas e vennozh
d'he c'hemer gantañ d'he zreuizplantañ.
He diwriziennañ a reas neuze
hag he c'has gantañ.
Met tomm-gor e oa an heol
hag aon en devoe e weñje
kent dezhañ diraez Naksos.



Kavout a reas neuze un askorn labous,
lakaat ar blantenn e-barzh ha mont
pelloc'h gant e hent. Met en e zaouarn
benniget e kreskas ar blantenn
buan-buan, o tont er-maez dre an
daou benn eus an askorn.

Aon en devoe adarre e weñje hag
en em c'houlenn a reas petra ober.

Da neuze e kavas un askorn leon
a oa brasoc'h eget askorn al labous
ha sankañ a reas askorn al labous
gant ar blantenn e-barzh hennezh.

Ur pennadig goude e kreskas
c'hoazh, o tont er-maez eus
askorn al leon. Kavout a reas un
askorn azen a oa brasoc'h eget hemañ
ha sankañ a reas e-barzh askorn
al labous hag hini al leon,
ha diraez Naksos.



Pa fellas dezhañ plantañ ar blantenn e welas e oa peg he gwriziennoù ouzh an eskern ha ne c'helle ket distagañ an eil re diouzh ar re all hep terriñ ar gwriziennoù: he flantañ a reas neuze evel ma oa.

E berr amzer e tiwasas, e kreskas hag e teuas da winienn, gant he bec'h rezin. Diwar ar re-mañ e fardas ar gwin kentañ ha sellet a reas ouzh an dud oc'h evañ anezhañ.

Na brasat burzhud! Pa eve an dud e richanent, er penn kentañ, evel laboused; pa event muloc'h e teuent da vezañ kreñv evel leoned, ha pa event muloc'h c'hoazh e teuent da vezañ hañval ouzh an ezen...



AN TORR-PENN

Albac'henoù Tonton Fili

Pa'z eas Arzela da di hec'h eontr da dremen he vakañsoù e verzas hepdale e oa kalz traoù na blijent ket dezhañ.

Bourrañ a rae oc'h evañ kafe, hogen ne c'helle ket gouzañv an te. Mat e oa profañ segalennoù dezhañ, met morse ne vutune sigarettennoù. Gwiskañ a rae heuzoù pe [gofignonoù, hogen morse ne wiske botoù-koad pe botoù-lêr. Dezhañ e plije ar chas hag ar c'hizhier, met ne oa ket evit gwelet saout pe tirvi! Nac'hañ a rae bevañ e-barzh un ti pe un deltenn: e-barzh e vag e veve, ha ne oa ket ul lestr bras. Alies e selaoue sonerezh, ha fuloriñ a rae en abeg d'an disterañ trouz. Gwell e oa dezhañ ur c'harr-nij eget ur c'harr-tan, ha ne oa ket evit gouzañv miz Eost...

Buan a-walc'h e verzas Arzela e oa boutin albac'henoù Tonton Fili war un dra resis. Ha dizoloñ a reot ivez petra eo skred Tonton Fili?



Kemennadenn

Kavet eo bet ar skridig-mañ:

Hag un dra zivoutin a zo gant an dornskrid-mañ? Ac'hanta, tudoù, furchomp gant hon daoulagad pizh, ha kavout a raimp diouzhtu, sur a-walc'h!

Kudenn Yann...

Satorde! N'eus mui butun gant Yann Klakevara! Ma! Dastumet 'vo kosh tammou sigarettennoù... A-benn ur pemadig en deus Yann dastumet 49 anezho rak gousout a ra ervat e ranke kaout ? tamm evit amboulat ur sigaretenn. Pegelit amañ e, pado e vutun, ma'a a ur sigaretenn gant Yann bep hanter-eurvesh?



An teir skerb

Edo Gwenn, Rozenn ha Maelenn o vale asambles pa lavaras plac'h he skerb liv-ros: "Ha merzet ho peus hon eus pep a skerb paret gant hon anvioù, hogen hini ebet ac'hanomp n'he deus ur skerb a gloc gant he anv?"

- Gwir eo!" a lavaras Gwenn.

Ha gouest e viot da lavaret gant piv emañ ar skerb wenn, an hini liv-ros hag an hini velen?



Alan BARVEK hag an Normaned

Gwelet hon eus (TALABAO 7) penaos e teuas
mab Yudikael, Alan, da vezañ Roue an holl Vretoned
dindan an anv a Alan-Veur.

E peoc'h e chomas Breizh diwar neuze,
e-pad ugent vloaz, da lavaret eo betek marv Alan-Veur
er bloavezh 908... Raktal goude-se en em gavas Breizh en arvar
ur wech ouzhpenn; dont a reas an Normaned d'hec'h aloubiñ adarre.

An Normaned

Vikinged a veze graet ivez diouzh ar
boblafis-se a Norvegi, Daniz ha Svediz.
Marteze e teu an anv-se eus ur ger hen-
skandinavek, "vik", a dalveze kement ha
"lenn-vor"? N'ouzer ket ez-resis. Pezh
a ouzomp mat ez eo e oa ar Vikinged ul
lodenn eus yaouankiz ar broioù skandi-
navat, bet harluet hervez lezenn, evel
ma veze graet bep pemp bloaz en abeg
d'ar haourentez a rene eno er mare-se.

Setu enta armeadoù bihan a baotred
yaouank kaset war vor dindan renerezh
ur "Roue ar Mor", hag i o klask rannañ
ar bed kenetrezo dre ar morbreizherezh!

Siwazh! Hag i merdeidi anpart pa ve-
zent war vor, e teue an Normaned da ve-
zañ soudarded kriz ha galloudus pa ve-
zent war an douar, evit brasañ gwalleur
annezidi ar broioù ma touarent enno...



Alouberien widreüs

Gant an avel o c'hveshañ krefñ en
he gouelioù, pe a-nerzh he roeñvoù,
setu ar vrag vras, an drakkar, o skeiñ
war-zu ar c'hornôg.


Bigi hir, izel war ar mor e oa an
drakkarou. Un tregont bennak a roeñvoù
ha div ouel a gase al listri-se buan-
tre war an tonn. Klinket e vezent gant
kizelladurioù loened-arouez ar Vikin-
ged: unan anezho en deus roet e anv
d'an drakkar, dre ma teu an anv drak-
kar eus ur ger skandinavek, "drekin":
aerouant. Ouzh diaraog bag "Roue ar
Mor" e veze gwelet alies penn un ae-
rouant, brini, tirvi, loened pe delfi-
ned a rae ivez evit klinkañ al listri.

Skoedoù ront ar Vikinged a veze ren-
ket war kostezioù pep bag, a-us d'ar
roeñvoù. Gwenn ha karrezennek e veze
peurliesañ gouelioù bigi an Normaned.
Dav e veze tec'hel kuit pa veze spur-
mantet unan anezho nepell diouzh an
adodh!

Un aber bennak an hini a dalveze da
zor evit an Normaned, ha chom a raent
dirazi a-raok aloubiñ ar vro nevez.
Arabat krediñ e oa paotred seven eus
an hailhoned kriz-se! Kuzhet er ple-
goù-mor e c'hortoent an noz hag ar
gorventenn evit mont betek goueled an
aber, kent bezañ bet spurmantet, ha
douget gant froud ar mor.

Kerkent ha dilestret en em lakaent
evel perc'henned war ar vro en ur
blantañ ur goaf en douar!

War-un-dro gant al listri bras e
teue gant an Normaned bigi bihan a
raent ganto evit mont gant ar stêrioù
bihanoc'h betek kreiz ar stadoù ha
kouezhañ dic'hortoz war ar c'hêrioù
hag ar c'hêriadennoù. Aze e veze lae-
ret pep tra, lazhet pep annezad ha de-
vet pep ti...





Tec'hel kuit

Goude marv Alan-Veur e teuas Gourmaelen, kont Kernev, da vezañ roue nevez Breizh. Siwazh, ne c'hallas-cñ ober netra a-enep d'an Normaned...

Distrujet e voe ar c'hêrioù hag ar manatioù. Abati Landevenneg, hor boa komzet diwar e benn e TALABAO 8, a voe distrujet er bloavezh 913.

Tec'hel a reas menec'h Breizh kuit, o kas ganto o levrioù prizius, o zeñ-zorioù ha relegoù ar sent. Bro-C'hall a voe kavet repu enni gant an darn vuiañ anezho: e Poitou evit menec'h abati Redon, e Déols evit re Logunec'h ha re Sant-Jili-ar-C'head, e Paris evit re Sant-Malo, Dinan ha Dol...

Menec'h Landevenneg, int, a yeas da glask repu e-maez eus Bro-C'hall, e Flandrez, e Montreuil-sur-Mer.

An aotrouien a dec'has ivez, setu ne chomas er vro ken nemet ar gouerien baour, a c'houzavhas beli ar Vikinged.



(Skeudenn hervez "Faolennoù eus Istor Breizh", ijinet get E. Boiseq ha treset gant E. ar Galleg)



Breizh aet da get

Er bloavezh 911 e sinas Charlez an IIIvet, roue Gall, ur skrid-emglev a voe roet drezañ broioù ar Seine izelañ d'an Normaned renet gant Rollon.

Goude Rollon e teuas Gwilhoù Kleze Hir da vezañ roue war an Normaned: dezhañ e voe roet... Breizh e 921, hag ar C'hotentin, an inizi Gvernenez ha Jernenez da c'houde, er bloavezh 933.

E Breizh e voe savet damanioù gant Vikinged dizalc'h, e Kernev ha dreist-holl e Naoned. Aber ar stêr Liger a zeuas da vezañ ur gwir vro skandinavet emren! Ur wech piaouet al Liger ganto e voe aes d'an Normaned aloubiñ ar broioù tro-war-dro, ha plantañ o reuz enno...

Bez' e c'haller lavaret ne oa ket a Vreizh ken etre ar bloavezhioù 919 ha 936. Mont a reas ar Brezhoneg war gil neuze, betek e vevenn a-vremañ, war-bouez nebeut.

Histor



An emsav

Aet skuizh gant beli ar Vikinged ez emsavas kouerien Kernev er bloavezh 931. Lazhet e voe Felekan, rener an alouberien... hogen rankout a reas ar Vretoned en em zaskorif buan da Wilhoù Kleze Hir. Ne badas ket pell trec'h an Normaned koulskoude...

E 936 ez emsavas ar gouerien adarre. Kemer a reas Yann, abad Landevenneg, penn an dispac'h ha kas a reas unan eus e venec'h da Vreizh-Veur da ger-c'hat ur priñs breizhat.

Chomet e oa Alan, mab-bihan Alan-Veur, en harlu e Breizh-Veur e-kichen a dad-paeron ar roue Athelstan.

Goulennet e voe digantañ distreiñ da Vreizh. Nebeut goude e tilestras Alan Barvek e-kichen Dol.



Ul lestr norman, hervez pallenn-voger ar rouanez Mathilde, lien brodet e Bayeux (Bro-C'hall) en XIvet kantved

Trouz klezeier...



Delwenn Alan Barvek e kêr An Naoned

Kerkent ha dilestret gant e arme e roas Alan Barvek lamm d'an Normaned e Dol. Goude-se e voe trec'h et ar boblañs hailhoned-se e Plouvro e-kichen Pempoull. Mont a reas Alan betek Naoned da bilat ar Vikinged a oa du-hont. Distreiñ a reas neuze da Vreizh-Izel da bulluc'hañ an Normaned a chome...

Argaset e voe ar viltañs da vat goude emgann Trañs, etre Dol hag Etraon, er bloavezh 938. Deuet e oa ar peoc'h da Vreizh en-dro.

Goude an taol kaer-se e voe anavezet Alan Barvek evel rener Breizh a-bezh. Ri a voe graet dioutañ, da lavaret eo roue, hogen e-lec'h bezañ anvet da roue e tibabas Alan Barvek bezañ anvet da zug, hag an holl duged war e lerc'h a voe anvet dug-roue... met dug nemeten en diavaez da Vreizh.

Chom a reas hor bro e peoc'h neuze, betek ma varvas Alan Barvek e 952.

...Eurêka!!

C'hoariomp... (p. 11)

Oberiadurioù Marivon

R=0, D=1, L=2, O=3,
T=4, K=5, A=6

```

5 6 1 3 0
+ 4 6 3 2
-----
6 0 7 6 2
    
```

(Amañ e c'hell an L
bezañ par da 8 pe 9
ivez!)

Sellit pizh!

Kement-ha-kement
eo al linennoù-se,
evel-just...

ANAT eo!



Ar gael-ifern

```

LAGADENN
IVEZ BOE
MEN HEUZ
ELAZ NE
SOUFLU
TOUR AI
RAEULO
ANGELLOU
    
```



Gerioù (p. 16)

Evel petra?

- 1/C: Teñval evel ur sac'h
- 2/D: Sklaer evel lagad an naer
- 3/E: Laer evel an dour
- 4/F: Kreñv evel ur marc'h
- 5/B: Pinvidik evel ar mor
- 6/A: Paour evel ur razz iliz

Ar veskellgarrezenn

```

E
EVN
ENVEL
LEVENEZ
NEVEZ
NEV
E
    
```

Al lizherenn a vank

```

MENN
PENN
GENN
TENN
LENN
RENN
    
```

An torr-penn (p.33)

Albac'henoù Tonton Fili

Ne blij ket da Donton Fili kement
tra a zo al lizherenn T ennañ!
Pebezh oristal!

Ar gemennadenn

Skrivet eo bet ar skridig-se hep
ober gant al lizherenn E, hag
a zo al lizherenn a gaver an
a-lesan en hor yezh.

Kudenn Yann

Peder eurvezh. Graet en doa Yann
7 sigaretenn o deus roet 7 tamm
all; setu ez eus bet 8 sigaretenn
gant Yann! Na gwidreüs!


An teir skerb

Gwelomp: ne c'hall ket ar skerb
wenn bezañ gant Gwenn: klotañ
a rafe liv he skerb gant he anv.
Dre ma respont Gwenn da blac'h
he skerb liv-ros ez eo aes-tre
dezastum ez eo melen skerb Gwenn.

Setu! Aes eo brémañ dezastum ez
eo liv-ros skerb Maelenn ha gwenn
hini Rozenn...

Azeuldi an Daouelezh (p. 2)

Spi 'm eus n'ho peus ket bet re
a vec'h evit kavout an hentoù-mañ:





TALABAO, embannet gant AN HERE, 16, straed Jules Henriot, Kerdrezeg, 29000 KEMPER. Rener ar gazetenn: Alan DIPODE. Kasit gwerzh ho koumanant da dTALABAO, Hent-dall Kergelenn, 29112 LANDUDAL. 120 Lur ar bloavezh. Koumanant skoazell adalek 150 L. Koumanant evit ar broioù estren: 150 L. Chekenn da vezañ karget en anv AN HERE. Diskleriet hervez al lezenn c'hall Gwengolo 1988. Lezenn c'hall 49-956/16-07-49 a-zivout an embannadurioù evit ar yaouankiz. Lakaet er moull e ti gKloatr, mouller e Sant-Tonan, 29220 LANDERNE, Breizh.

© AN HERE, 1988.